

# KIMIADOU

## EUR ZOUDART YAOUANC

O Kuitad e guerent hac e Vigonet

COMPOSET ER BLAVEZ 1946

VAR AN TON A ZEZIRFET

---



Me so eur soudart yaouanc o vonet d'an arme  
A meus hoant ziscleria daro demeus va bue  
Mes an amser a vanq din ma speret so troublet  
Mar vancan da recita me veso excuset.

Creno va ra isili mantret heo va halon  
Na meus quet mui eur moment a gonsolation  
Mar miset bet ar galont eur speret cales guel  
Gant an discadures en devoa Duhanel.

Pe autraman ouspen eur speret da zisci  
Evelt m'en devoa bet ar prins Zingaleri  
Coulén a ran eun talant velt en devoa Mozar  
Ebars en amser guechal pa va var an douar

Sclerigen digant Doue goudese ar pouvoir  
Evit galout pen dre ben discleria an histoïr  
Pehini so composit bars ar blaves present  
E nor bro ni bretonet gant eur zoudart yaouanc.

Pehini so glaharet tont da guitat e vro  
Deut gantan va mignonet da vesca o taëio  
Houï etrezoc'h tud yaouanc silaouit mad eta  
Gant an darn vras a hanoc'h hoarveso memes tra.

Evit petra discleria e vues pen da ben  
Discleria rin seulamant e amser a anquen  
Hini an tad ac vam pere a jom e guer  
Den a so evit compren peguement in tener.

Dre ma oa eun den contant oa ive eur pot fur  
Mar vise chomet er guer pebeus deur plujadur  
Mes an amser a so deut couls a vit a real  
Billet en deus recevet ret a vo partial.

Tosteit va mignonet da glevet ar himiad  
Peguer cri an disparti deus eur vam ac eun tad  
Goude quement al a boan seo bet deus er maga  
Bremán eo ret e guitad pa seo deut ar guella.

Briato a ra e vam neur laret kenavo  
Comprenit eta breman peguement a zaëlo  
A zeu eus a daou lagat o vriata e buguel  
O lavaret kenavo couls a oa desi mervel.

Pa oan me eus da vaga emesi va buguel  
Alies meus sonjet en disparti cruel  
Gant peguement a boan a meus me da zavet  
A da zileset breman col a rin va speret.

Pe zelin demeus da blas lec'h a vises e nos  
En quichenic an tan a roc mont da repos  
Da vele a da zillat ac ive quement tra  
Ar pes zo bet ne servich rayo din gouela.

Mes pa zeo ret da guitad me lar dit quenavo  
Aroc ma vi distroet matrese vin maro  
Quitad va hrouadur goude ma zeo maguet !!  
E neur laret quement man e halon Zo mantret.

Guelet eur vam mantret ac eun tad a ouëlan  
Glahar vras ezeo certain panem consideran  
Briato a ra e dad o laret henavo  
Calet es va mignonet clevet o himiadou.

Petra a rin me breman pa vije partiet  
Na meus mui evit partaj mes nec'h a poan speret  
Allas va hrouadur houman zo eur glahar  
Abaoue e mon er bed na meus quiet bet e far

En lec'h ar joa ar blujadur oa pelso euon ti  
Breman vont chanchet gueneomp en tourmant ac ennui  
E plas ar hanouenou e vises o canna  
Ramplacet vont gueneomp siouas eueur ouëla

Pa zeo ret dit partial quers hardi va mab quer  
En servich an nation gra ervad da zever  
A gant eur honje mad mar tristroes en dro  
Gant ar joa deus da velet a vo fin don daelo

Neuse o pedan va zud quer tchet nem gonsolet  
Va speret a zeui dar guer bep heur a bep monet  
Rac pa vesin partiet ac et er mes ar vro  
Pa zeuin da sonjal enoc'h me a scuillo daelo.

Defot besa bars er guer velt dan amser dremenet  
Evit ober ma fossibl da vesa o consolet  
Mes savomp on holl glemou da bete tron Doue  
Pa zeo guir a zirij tout herves e volonte.

Gout a ouzoc'h couls a me eo laquet da ped den  
E chans var an douar ives e blaneden  
Eun hent a so domp tracet hant Doue puissant  
Dre henes a dremenimp a pa vemp drouc contant

Ar pes a lavaran deoc'h breman neur guemiadi  
Eo dont de nem gonsoli no hamser a gosni  
A me ya a galon vad vels o peus din laret  
Gant eur guir esperans pa zout hoas do quelet.

Cetu me partiet eus a dy va zud ques  
Evidomp tout va breudeur pebeus tristedigues  
Matrese nem velfomp mui biquen var an douar  
Pa zonjan en quement se a meus poan a glahar

O va Doue puissant consolet va speret  
Da bete ty va mestres a meus hoas da vanet  
Desir a meus d'annous dei ar helou dinatur  
Or halonou a rano gant an displujadur.

Salud de hu va mestres rouanes va speret  
Deut es o breman an heur da vesa sepapet  
Et tresomp ni a so bet gond ouzoc'h va mestres  
Marvaillou consolant ac a joa allies.

Breman pa seo deut an heur vit enem separi  
Deut dre o comsou charmant un tam dam honsoli  
Rac o comsou plah yaouanc o deveus ar pouvoir  
Da rejouisso eur galon de seno aglahar

O consoli va mignon na rin mui davantaj  
Va speret a so nijet a colet houraj  
A nen deus quiet hoas pe so me moa deho prometed  
Eur garant es barfet pueit a vin var ar bed.

Dre se o pedon ives delhit ar bromessa  
N'ani poa gret dan eil zul a vis eost divesa  
Mar besit fidel din emesi va mignon  
Ar garant es evidoc'h a zon don em halon.

Va harantes va mestres na finisso biquen  
Ken a vesimp separet gant Doue eternal  
Breman houlan diganec'h quen evit partia  
Eur zin deus o carantes pe merk ar bromessa.

Ba zeo en honestis n'ani a houlenet  
Birviquen den yaouanc na viot refuset  
Delit va servicher kemerit va goalen  
Nac hor harances ou daou e lakit da eren.

En amser e vec'h er servich me a vo o mestres  
Pa vo echu o conge hem e prialedes  
Partial a renket a velan den yaouanc  
A me a joms er guer da vevi gant tourmant.

Na ouefen burviken explica va glahar  
Echu eo ma flujadur breman var douar  
Kenavo den yaouanc pa seo ret o quitad  
Meur a dapad en daëlou zeui eus va daou lagad.

Breman epad o couge emei va servicher  
Da hep eun nomb amzer houï scrivo din liser  
Partiet a galon vad emezi den yaouanc  
Gras deh de nem gontanti bepred no regiment.

Arsa va mestrezic desir a meus brema  
Da ret dec'h eun souvenir quen evit partia  
Cetu aman eur mouchouar gant va daëlou trempet  
Ac a zeziran rei dec'h m'o ped en kemeret.

Evit na neufet da zonzal pas vin em regiment  
Er boan so eus o quitad va mestrezic yaouanc.  
Partial a renquen lavaret quenavo  
A besit fidel dinme dalhit mad do comzo.

Neuse deus ty ma mestres me ya a galon vad  
Betec ma oan nem gavet bars e kichen eur hoad  
Enem gavet eno me arretas em za.  
Da sonjal bars em mestres ma gomançis gouella.

Coajou bras ec eureus me meus da dremenet  
Alies o hont da velt va guir vuyat caret  
E han breman da zisheoli didan eus da vrancou  
A da gonto va doare da lod eus da zeillou.

Ne doun mui evit comto breman d'am guir vestres  
Va halon e so mantret gant an dristidigues  
Prostern a ran dan daoulin didan brancou ar gue  
Evit goulen asistans digant ar guir Doue

Va speret a so savet tre da betec e dron  
Da houï evidomp on daou e venedictton  
Ouspen a meus goulet dre ma se puissant  
Bars en plas diou galon drist da lacat diou gontant

Gout a ouson va mestres e deveus calonad  
Va hunan a meus ives pa zeo ret ehuitad  
Deus a nos ac ar mintin alies var an de  
Teui nor memoir da zonzal a neil ene guile.

Rac diou galon unanet dre garantas barfet  
A ra cales poan ganto pa vent dispartiet  
Pa oan me e creis ar hoad akedet o ouëla  
Me a glevey eun eonic us va fen o cana.

Mel o sevel va daou lagat da zelet eus an eonic  
Estonet ens e glavet o cana magnific  
Neur adres desan comzou casi evelt deun den  
Gant eur galon mantret a carguet a anquen.

Arsa ta eonic binn me no hont dans arme  
O pedi ran da anonc breman dam harante  
Eur helou consolant a meurbet favorab  
Vit ma zizeho an dour demense daou lagat.

Pa vin erru en arme me a rimo eur zon  
A matrese quement se a rei joa de halon  
Me zigaso eur hopi dar guer dam mestres coant  
Eun al a salhin gueuen bepred er regiment.

Gout hano ar hamposer matrese a zeziret  
Corentin or Bouard dre oll eseo hanvet  
Pen devoa e homposet e oa en Algeri  
Neur guer a so en Afrik ac e hano Bougi.

Breman en illis ven a ra zemeurañç  
Ebars eun Bannalec neur hornic deus ar Franç  
Eno ema breman sables gant bried  
Graç deso de nem garet keit a vont var arbed





# CHANSON

## POTRET PLOUILLAU

Var ton : Adieu Pontreo

M'am bije speret da gomprenn, evel a meus fantasi  
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret dar gonscrivet yaouanq  
O deus tennet ar billet ebars er blaves present.

Ebars er bla mil nis cant c'hoec'h, ar bemp a vis guengolo,  
E seo digueet adare eus a barres Plouillau  
Tud yaouanc evit an arme, tud deus an terrupla ;  
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quet nemet pevar ;  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Maledar,  
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant ;  
Pevar den eus ar re vrava, corfou koer ha tud vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en daiz-se d'he gamarad :  
Ema a so eun deves trist hac a ra din calonad !  
Guelet va mam baour o vouela, ha va sad ques desolet !  
Va c'halonic ebars em c'hreis so dija casi rannet

Kals a sonchfe de, martese, pennos e vent eur poultron  
Em be aoun rac eun ten fusuil pe rac eur voulet canon  
Pe otramant aoun rac ar fatig o vale dre an hentchou  
Pe gousquet var eu guele gant ebars er c'hordgardou.

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va sabren  
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hac ar vouillen  
Ha goude e fin va beac'h, rencout martese campi  
Pe gousquet var an douar ien, pe otramant bivoaki.

Tor o deus an nep a sonch-se ; ma c'haljet lenn em c'halon,  
Evit gwelet va bolonte ha va inclination,  
Ma ne fotje nemet va goad, me en scuilfe tout joaus  
Evit souten eun Impalaer eun tad quer carantesus !

Piou na gombatfe quet gant eun Impalaer christen ;  
Eur gaus ker just ag e hini, so facil d'a souten,  
Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudardet an Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, quen quittaad eus om c'homtre,  
Demp ni da ilis Plouillau ar supplia on Doue  
D'hor preservi demeus goal chans pa vesimp en armeou  
Ha da gonsoli, bars ar guer, hon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autrou Sant-Millau, patron eus ar barous ma,  
Adieu kerent ha mignonnet, cessit breman d'a vouela.  
Pedit Doue hag ar Verc'hes, da gavet soign ac'hanomp,  
Hac hon .El mad d'on c'hondua partout elec'h ma zetomp.

Adieu, va mab, va esperans. eme an tad desolet ;  
Piou a gonsolo va zud paour, goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cosni, me vo clevet o laret :  
Ma vije ma mab ques er guer, en dije va soulajet.

Clevit ar vam o quiniadi ive digant he buguel ;  
Deus ama c'hoas, ma boquin eur vech quent evit mervel  
Aben ma retourni d'ar guer, me vo ed eus ar bed-ma,  
Deus aman etre va dioubrec'h evit ar voech divesa.

A guichen at moment fatal ma c'heus tennet ar billet,  
Beb nos vel ma fot din cousquet, me a seblant da velet  
O tont deus eur combat sanglant var eur chariot bleset  
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen evit partia,  
Evit essai o c'honsoli a lavar en eur vouela :  
Tavid va zad ha va mam baour, ha bevit en esperans,  
Doue, tad a visericord, a so hras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gras Doue gar ar Verc'hes, e veso fin do clahar  
Evit merk eus hon vaillant, gant lore deus hon tocou  
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taelou.

Adieu da baros Plouillau, ha de holl habitantet,  
Adieu d'hon oll anaoudegas, ha kerent a mignonnet,  
Ha ma na memp quet ar bonheur er bet-man da em velet  
Gras deomp ebars er barados assambles da em gavet.